

Pedagogiezh



War ma divskoaz emañ Sarah. An holl verc'hedigoù hag an holl baotredigoù en em santan e karg anezho. En ur mod all e rankomp sevel ar bed.

Albert Jacquard



Perak eo 'h buhezour ?

- Peogwir eo plijus ha kentelius labourat gant bugale.
- Peogwir em eus bet plijadur e kreizennoù vakañsoù pa oan bihan, hag em eus plijadur c'hoazh bremañ, evel buhezourez.
- Evit prenañ skiant, dre ma'm eus c'hoant da vezañ desaverez.
- Evit gounit un tamm arc'hant.
- Dic'hortoz e vez ar vugale, tu zo da vevañ traoù brav ganto.
- Evit reiñ plijadur d'ar vugale ha degas reolennoù ar bevañ asambles.
- Dazont ar gevredigezh eo ar vugale.

(stajidi DABU)

Merzet e vez ez eus a bep seurt palioù gant ar vuhezourien yaouank : palioù hiniennel (kaout plijadur, gounit arc'hant, prientiñ ur vicher), palioù pedagogel (degas reolennoù d'ar vugale, deskiñ an doujañs) ha palioù desevel (degas talvoudegezhioù).

Alies ne ra ar vuhezourien nemet aozañ frapadoù buheziñ (c'hoarioù, beilhadegoù...) ha pep hini eus e du a-wechoù. Peseurt liamm zo etrezo? Perak e labouront asambles? Petra a fell dezho degas d'ar vugale ?

Lod eo ar vuhezourien eus ur skipailh, kenurzhiat gant ur rener hag a labour gant un aozer (ti-kêr, kevredigezh, poellgor embregerezh). Da bep live e balioù hag e raktres :

- ar raktres desevel embannet gant an aozer evit lakaat sklaer e vod da welet ar gevredigezh hag an talvoudegezhioù pouezus evitañ.
- ar raktres pedagogel savet gant ar skipailh buheziñ evit termeniñ palioù ur frapad resis (ur c'hamp vakañs pe ur bloavezhriad kreizenn dudi da skouer).
- ar raktres obererezh savet gant ar buhezour evit pep abadenn buheziñ kaset gantañ.